

YF_0114_Ar vinorez

(bal plin)

Deus ganin, minorez, deus ganin-me d'am bro
Me ho lako gouarnerez, war toud ma oll vadou

Me ho lako gouarnerez war ur bufed arc'hant
Hag an alc'houez e-barz ho kodell, da gemer pa ho-po c'hoant

Salokras den yaouank, n'on ket merc'h d'ur baourez
Me n'in ket ganeoc'h d'ho pro, 'wel valigantourez

Me n'in ket ganeoc'h d'ho pro, evid aour nag evid arc'hant
Ken e vin aet e-barz an iliz, dirag ar sakramant

Ken e vin aet d'an iliz vis-a-vis d'an aoter
Ha lakaet a-uz d'on pennou, gant an asperjouer

Ha lakaet a-uz d'on pennou, gant an asperjouer
Ha lakaet war ma biz, ur walennig aouer

Ha lakaet war ma biz, ur walennig aouer
O neuze 'ta den yaouank, me hey ganeoc'h d'ar ger.